

Anavezout a rit ar 6 abeg mat da ginnig
d'ho pugale ar chañs da gomz div yezh ?

1

Ur binvidigezh evito

2

Broudañ o dihun

3

Plijadur an deskiñ

4

Un elfenn a-bouez evit al liesyezhegezh

5

Un digor war o sevenadur, un digor war sevenadur ar re all

6

Un endro a-du e Breizh

Evit gouzout muioc'h,
grit goulennoù, evezhiadennoù,
deuit en darempred ganeomp :

• **Kuzul departamant Penn-ar-Bed :**

Gwarez ar mammoù hag ar vugale - Pgz : 02 98 76 22 02 - Postel : irene.legouill@cg29.fr
Kefridi brezhoneg - Pgz : 02 98 76 20 84 - Postel : mark.masson@cg29.fr

• **Kuzul Rannvro Breizh :**

Kefridi yezhoù Breizh - Pgz : 02 99 27 96 42 - Postel : kristen.legars@region-bretagne.fr

• **Ar gevredigezh Divskouarn :**

Karget da vroudañ ha da ziorren ar brezhoneg a-raok ar skol
e-touez an tadoù hag ar mammoù hag an dud a vicher a ra war-dro ar vugale vihan e Breizh :
Pgz : 09 60 04 79 83 - Postel : divskouarn403@orange.fr - Internet : <http://divskouarn.free.fr>



www.cg29.fr



www.bretagne.fr

Augural RCS 8.349.728.410 NANTES

An divyezhegezh evit ar re vihan,
un elfenn a-bouez en o buhez.



E Breizh,
meur a c'her ront ar bugaligoù
evit ar memes kazh.

Brezhoneg e divskouarn ho pugaligoù klevet e ti ar skoazellerezed-mamm, ar magourioù hag ar skolioù-mamm divyezhek.

1

**Pep yezh zo un doare da welet ar bed.
Ur gwir binvidigezh eo gouzout div yezh.**

**Une langue est une manière de voir le monde.
Avoir deux langues, c'est une vraie richesse.**

Pep yezh zo enni doareoù disheñvel da soñjal, da sellet ha lavaret ar bed. Gant pep hini e vez frommadennoù, mennadoù ha talvoudegezhioù a galeta an darempredoù sokial. Diskouez a reont doareoù sokial ha sevenadurel dezho o-unan. Un elfenn a-bouez int evit identelezh pep den. [Ur binvidigezh eo ar yezhoù-se hag e rankont bezañ dalc'het ha brudet evit al liested er Frañs](#), en Europa hag er bed.

2

Gant an divyezhegezh abred ez eo broudet ar vugale da zigeriñ o spered.

Le bilinguisme précoce stimule l'éveil de votre enfant.

Soñjal ha komz div yezh a zegaso dezho an hanter muioc'h a blijadur. E-giz-se o do daou zoare d'en em welet er bed. [Pinvidikaet e vo ijin ho pugale gant se](#). Evit ur bugel ez eus e pep yezh ur sevenadur dibar, un ijin dibar, gant he zroioù-lavar, he c'hoarioù gerioù hag he c'hontadennoù evit ar vugale.

3

Ur bam eo ar varregezh zo gant ar vugale, adalek o ganedigezh, da zeskiñ ar yezhoù !

L'enfant, dès sa naissance, dispose de capacités étonnantes pour apprendre les langues, encouragez-les !

E pep yezh komzet e kav ar vugale, a-raok bezañ gouest da zistagañ un nebeut gerioù zoken, sonioù, stummoù, ha kenoazadoù gerioù tro-dro dezho. Goude bezañ bet "soubet" er yezh-se e krogont da eskemm gant an dud tro-dro dezho, dre c'hoarioù pe dizoloadennoù. Frealzet e vez ar vugale gant an aergelc'h-se [hag e krogont da gaout plijadur da ezteuler mennozhioù, da selaou, da lavaret en-dro, da gaout respontoù d'e goulennnoù, hep kaout aon da faziañ](#).

4

Kas a ra an divyezhegezh d'al liesyezhegezh.

Le bilinguisme prépare au multilinguisme.

Deskiñ un trede pe ur pevare yezh a vo aesoc'h a se. [Ar vugale a gomz div yezh a grou "treuzelloù" en o empenn a aesa deskiñ yezhoù all](#). Diskouezet eo bet an dra-se splann gant bugale eus Nederland, eus Danmark, bugale koubladoù estren o chom e Frañs. Alies int gouest da gomz aes teir, peder, pa n'eo ket pemp yezh.



Anavezet eo ganeoc'h ?

E poblañs ar bed e vez kavet aliesoc'h tud divyezhek pe liesyezhek eget tud unyezhek ! 65 % eus an dud a implij div yezh d'an nebeutañ en o buhez pemdeziek ha war-dro 50 milion a dud en Europa a gomz ur yezh rannvroel.

Komz a reont eus o divyezhegezh

Familhoù a gomz eus o divyezhegezh er vuhez pemdez e Breizh. Dizoloit ar film-se, desket e vez kalz a draoù ennañ, respontoù 'po suc a-walc'h d'ho koulennnoù.



Emgav 'po gant
3 familh !

5

Pa anavezet e wrizioù e klasker anavezout re an dud all.

**Connaitre ses racines,
c'est être prêt à apprendre celles des autres.**

Dibab lakaat e vugale da zizoleiñ sevenadur ha yezh e rannvro, [zo sikour anezho da c'houzout piv int](#). Sikour a raio anezho ivez da gompren an dud a gomz yezhoù all, gant orinoù disheñvel ha doareoù da vezañ disheñvel.

6

Un endro mat zo e Breizh

Un environnement favorable en Bretagne.

Ho pugale a gresko e Breizh, en ur rannvro zo kreñv he identelezh abalamour d'he istor, d'he endro sevenadurel, d'he sonerezhioù, d'he maezioù... Ar brezhoneg zo e pep lec'h e Breizh ! Dre ma vez tud o komz brezhoneg eveljust ! Met ivez en anvioù-lec'h, er sonerezh, el lennegezh, er mediaoù ha memes war internet... [Un endro mat zo e Breizh da ziorren an divyezhegezh](#).

Anavezet eo ganeoc'h ?

Ouzhpenn 12 000 skoliad zo e klasoù divyezhek pe dre soubidigezh e Breizh !

UR GOULENN DA PASCALE PLANCHE*

**Deskiñ un eil yezh adal ar skol-vamm :
Peseurt levezon 'neus an dra-se war boell ar vugale ?**

«... an disoc'hoù zo bet, pa geñverier ar vugale divyezhek hag ar re unyezhek evit ar memes oad, a ziskouez penaos pa vez desket un eil yezh abred dre soubidigezh e vez levezonet lañs mont en-dro an deskiñ, ha dreist-holl, an doareoù da gompren ha da bleidiñ gant ar c'heleier...»

*Kelenneret psikologiezh an diorren, klaskerez stag ouz ar KEBK – Skol-veur Breizh-Izel, in kannadig psikologiezh / rann 55(5) / 461 / Gweng. - Here 2002



Ma 'peus ur yezh-vamm n'eo ket ar galleg nag ar brezhoneg, Bezit lorc'h ennoc'h ha kasit anezhi d'ho pugale.

**Profit an divyezhegezh d'ho pabig,
e brezhoneg pe en ur yezh all eus ar bed !**